

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs round

**Roum**

Un deiz pa oan o vale  
Hed-ha-hed an hent bras (2w)  
Me 'welas en ur c'hornig un ostaleri vras

Roum..falaridondenig  
Ge...Sach da c'har a-dreñv

Ha dav d'an ostaleri  
Da stagañ da evañ (2w)  
Me 'glevas ur paotr bihan 'n e gavell o ouelañ

E-kichen ar c'havellig  
Paotrez a seitek vloaz (2w)  
Aezet war ur gador he divesker en noazh

He mamm 'lavaras din-me  
-« Houman ne dalv netra (2w)  
Mont gant ar baotred yaouank setu ar pezh a ra

- Ha c'hwi 'ta plac'hig yaouank  
C'hwi n'ho peus ket a vezh ? (2w)  
Da lammat dreist ar c'hleuzioù da c'hoari mesk-ha-mesk ?

- « Va mamm pa yaen er mod-se  
N' gaves ket din raen fall (2w)  
Gant va c'hamaladezed mont da heul ar re all »

- « Ma karjez bezañ chomet  
Er gêr da labourat (2w)  
Ne vije ket bet bremañ en ti o luskellat »